

## SEVEL SKRIDOU

### Petra raimp e-pad ar staj ?

Ar pal a vo skrivañ un danevellig mat da embann, adalek an deroù betek ar pik echu. Ar skrid a vo 1500 ger dezhañ da nebeutañ ha peurlipet e vo evit bezañ kinniget d'ar re all. Aes eo hunvreal en istorioù hon eus c'hoant da skrivañ hag a virvilh ennomp, met n'eo ket ken anat lakaat anezho war baper. Lakaet e vo ar gaoz war ar frammanñ, ar sevel tudennoù, an aergelc'h hag ar fromoù.

Ar pal a vo sevel bep a istor evit ar **yaouankiz** adalek un tem boutin. Roet e vo an tem devezh kentañ ar staj. Bez e vo prantadoù skrivañ hiniennel, poelladennoù a-stroll ha lennadennoù / eskemmoù da binvidikaat an istorioù.

### Dafar :

Ur c'hreion hag ur c'harned. Un urzhiataer m'ho peus unan. Degas un danevell / romant da ginnig d'ar stajidi all. Ur sac'had levenez.

---

**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.